

(494)

Chanson.

Na m'am be un tamic amzer, plûn ha liou ha paper quen,
 Me laqafe va fantasi da formi ur ganouen
 Din va-unan ha d'am mestrez, me meus-hi graet gant honor
 Ar quenta inclination deus a guichen toul va dor.

Un devez evit plijadur ha me mont da bourmeni,
 Ha me o raicontr va mestrez, ne voa get pel diourjin,
 Ha me hac o c'houl diganti, dre me c'haven contristet:
 Pe c'houi aneus poan a galon, pe c'houi a neus poan speret?

Hac hi o respont din-me gant un er qen gracios:
 Me ne don get sujet d'ar c'hlenvet, a drugare va Jesus;
 Mes ar goal deodon milliguet n'allint get en an'arnes,
 Cetu eno ar sujet veritabl demeus va zristidigez.

(495) Laret o deus dec'h, va mestrez, n'em boa na reny na leve,
 Quit e voac'h da glêvet gante, gout avoalc'h a vouiac'h se:
 An nep a choasfe ar bed-mâ en defe al loden vras;
 Mes an nep attrap an êvou en deus caeroc'h heritach.

N'em garomp eta, va mestrez, hac en em garomp hoy daou,
 Evel an dir hac an houarn pa vent tomet gant ar glaou;
 Lar ar rese pa vent pilet assambles var an nanve,
 Ne get facil dispartia an eil demeus equile;
 Qent e vanc'o ar voazou munud dont da rivier vras Moëlaou,
 Vit na vanc'omp ni, va mestrez d'ey em garet ni hoy daou.

(Vol. II, p. 494-495.)
 5 str. numérotées.